

AR VUHEZ KRISTEN

Even 1939

— N° 6 —

■ *Da heul Sant Fransez*

labouromp evit an iliz ■



LENNIT PIZ

KEMENT-MAN

Priz ar gelaouenn :

Ar Vuhez Kristen" hepken :

Koumanant ordinal : **10** lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 oferenn) :
15 lur

Ar Vuhez Kristen ha Kenteliou St Fransez

Koumanant ordinal : **13** lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 oferenn) :
16 lur,

Kenteliou Sant Fransez hepken :

3 lur (eur skoed)

SKRIVA DA :

Monsieur le Directeur de « Ar Vuhez Kristen »

Couvent des Capucins

C. C. 209-81 Nantes

ROSCOFF (Finistère)

Taolenn ar miz


Douster Jezuz e kenver eun avoultrerez.....	p. 103
Gouel ar Galon Sakr.....	p. 105
An eur eo an eur.....	p. 107
Seza n'he deus ket bet he fask.....	p. 108
Eur gwall abadenn.....	p. 110
Yaouankiz kristen ar maeziou.....	p. 112
Santez Anna ha Nikolazig.....	p. 115
Jezuz-Krist hag e relijion.....	p. 117
Ar falc'herien.....	p. 119

13^{et} bloavez

MEZEVEN 1939

N° 6

Ra vezo meulet Jezuz-Krist !.. Bepred



Kenteliou Sant Fransez

-- KELAOUENN AN DREDE-URZ --
Priz evit eur bloaz : eur skoed (3 frs)

An holl liziri a dle beza kaset da : R. P. Eugène Le Quéau,
Couvent des Capucins, Roscoff, (Finistère). — C/C. 291-62 Nantes.

Va Breudeur ha va C'hoarezed ker,

Er XIV^e kantved e oa e penn bro Frans eur rouanez hag a rene eur vuhez diroll ha mezus. He hano a oa Izabel a Vavier.

Evit derc'hel penn d'ar vuhez diroll ha mezus-se, an Aotrou Doue a zibabas e-kreiz unan eus brasa familhou Frans eur plac'hig hag a roas diwezatoc'h d'an holl eur skouer splann ha skedus eus ar baourentez, ar binijenn hag ar glanded er stad a briedelez.

Ar Plac'h-eürus Janed a Vaillé a vez graet anezi.

E-kichen Tours e teuas er bed-man. Yaouankik e oa c'hoaz, pa voe dimezet da Robert a Sillé, met ar Werc'hez Vari he-unan a reas d'ezi ober al le a c'hlanded. Chom a reas fidel d'al le-se, rak Robert ivez a oa eur c'hristen mat ha leun a zoujans eviti.

D'an oad a 30 vloaz, e kollas he fried, e voe stlapet er-maez eus he c'hastell, hag e voe ret d'ezi distrei da Vaillé, da di he mamm.

Deut e oa an eur eviti da danva eur baourentez dispar, eur baourentez din eus an aviel.

E-pad ugent vloaz bennak, e vevas en eun ti bihan e-kichen Sant Varzin; he holl vadou a roas d'ar beorien, hag a-dadek neuze en em lakas da gestal peadra da zebri.

War-dro an amzer-se eo e roas he hano da Drede-Urz sant Fransez.

Eun nebeudig goude e voe laket adarre er-maez eus he ri, rak an hini a roe d'ezhi lojeiz en doa aon na vije ket paeet. Janed a yeas neuze da chom d'eur marchosi, da c'houde da ospital sant Varzin, e-lec'h ma rae war-dro ar re glanv, hag erfin e ilizou ha chapelioù dilezet.

Evel Jezuz, mont a ra du-man-du-hont, hep gouzout pelec'h harpa he fenn. Er bloaz 1386, ez eo digemeret gant Tadou sant Fransez en eun tiig tost d'o gouest, hag eno e skrivas d'ar rouanez a vuhez fall eul lizer a-berz an Aotrou Doue. Mervel a reas d'an 28 a viz Meurz 1414.

E-pad 82 bloaz e pedas evit silvidigez ar vro, e reas pini-jenn hag e vevas paour evit rapari dizurziou hag ourgouilh eur rouanez diskiant.

*
**

Va Breudeur ha va C'hoarerezed ker, m'am eus kontet d'eoc'h istor ar Plac'h-eürus Janed a Vaillé, eo evit diskouez d'eoc'h ar pezh a c'hell ober, evit silvidigez ar vro, eun ene maget gant spered an Aviel.

Hirio, evel e amzer sant Fransez, evel e amzer Janed a Vaillé, ar bed a zo klanv; eman o c'hedal ar silvidigez, met silvidigez ebet ne gavo nemet dre ar gristenien wirion, ar re n'o deus aon nag eus ar binienn, nag eus ar baourentez, nag eus ar sentidigez, nag eus ar glande, nag eus ar vertuziou kristen all.

C'houi, va Breudeur ha va C'hoarerezed ker, a dle beza eus ar re-se,... hag eus ar re genta zoken !

Anez-se ne vefec'h ket din da zougen an hano a zougit; ne vefec'h na gwir gristenien na gwir vugale da sant Fransez !

Kemerit eta hoc'h aviel hag ho Reolenn; lennit, adlennit anezo, pleustrit warno gant evez, gant aked, gant kalon, ha lakit anezo ar buana ma c'helloc'h d'en em sila betek an distera oberou eus ho puhez.

Neuze e vezoc'h e gwirionez diskibien d'Hor Salver ha da sant Fransez. Neuze e vezo santel ho puhez, evel hini ar Plac'h-eürus Janed; neuze e tennoc'h ivez war ho pro bennoz an Aotrou Doue.

N'eus doare all ebet da savetei ar bed !

Lennit mat ar pezh a zo aman er penn uhela eus ar bajenn 3, diwar-benn "HON OFERENN".

HON OFERENN

Hiniennou o deus goulennet ma vije lavaret bep miz, e kouent Rosko, eun oferenn evit Drede-Urz Breiz-Izel.

Kement-se a vezo graet. Hiviziken eta, d'ar gwener kenta eus ar miz, e vo lavaret eun oferenn aman evit holl Vreudeur ha C'hoarerezed an Drede-Urz.

An oferenn a vezo « *hon Oferenn* », ha d'an deiz-se, bodet e-harz an Aoter, ni a bedo hag a gomunio an eil evit egile,... hag ivez evit Hon Tad Santel ar Pab. — An hini gerta a vezo lavaret d'an 2 a viz Mezeven.

BEVA DIOUZ AR REOLENN

Mari ar Gerveur a zo eur vamm a familh; pell-pell eman o chom diouz an iliz parrez. A-hend-all e vije aet d'an oferenn bep mintin, rak ar reolenn a c'houlenn kement-se hag eun devoision vras he deus d'an oferenn.

Met a-balamour d'he bugale e rank chom er gêr. N'eus forz, an oferenn a ginnigo bemdez d'an Aotrou Doue dre zaoarn ar beleg, ha kerkent ma c'hello, e ray d'he bugale vihan mont war o daoulin, hag, asamblez ganto, e pedo kalonek « an Tad a zo en Nenv. »

A-hed an deiz e tesko d'ezo karet ha servija an Aotrou Doue. N'ankounac'haio morse ar pedennou a-raok ha goude ar prejou, ha diouz an noz, eur wech echu al labour, e vodo adarre an tiegez a-bez evit ar bedenn diweza.

Da sul, ne chomo er gêr, goude an oferenn-vintin, nemet an hini eman e dro. Ar re-all a yelo d'an oferenn-bred ha d'ar gousperou, da-c'houde e tiströint d'ar gêr holl asamblez, hag eno, bezit sur, ar vamm a gavo buan an tu d'o lakat da gaout berr o amzer.

« *Du-man, emezo, ne vezer ket enouet; ni a zo eürus hag atao laouen er gêr* ».

Mari ar Gerveur a zo en Drede-Urz. Anaout mat a ra he Reolenn ha spered he Reolenn.

Pa vez deut a-benn da lakat he ziegez da garet an Aotrou Doue, da veva er peoc'h hag en eürusted hervez al lezenn gristen, neuze e oar he deus graet eun devez mat, heuilhet mat he Reolenn ha bevet diouz spered he Zad sant Fransez.

Hounez a ra enor d'an Drede-Urz!

PIOU DIGEMER EN DREDE-URZ

« *Mat eo kaout kalz tud en Drede-Urz, met ar pezh a dleer klask da genta, eo gounit d'ezhi kristenien a bouez hag a skouer vat. Arabat eo digemer an holl, ret eo beza striz war ar poënt-se.*

Lod eus ar renerien, c'hoant bras d'ezo kaout kalz tud en o Breueriez, a zigemer n'eus forz piou koulz lavaret. Ne reont ket mat ! Droug a reont d'an Drede-Urz !

(An Tad Bello, ministr jeneral).

TAOLENN AN INDULJANSOU. — MEZEVEN 1939

Deiz	GOUELIOU	Indul.
1 Y	Eus eizved ar Pantekost	I. P.
2 G	Pevare amzer. — eus an eizved	I. P.
3 S	Pevare amzer. — eus an eizved	I. P.
4 S	Sul an Dreinded	A.J.I.P.
8 Y	GOUEL AR SAKRAMANT	A.J.I.P.
13 M	eus an eizved	I. P.
15 Y	An eizved	I. P.
16 G	GOUEL AR GALON-SAKR	A.J.I.P.
24 S	S. Yann-Vadezour	I. P.
29 Y	S.S. Per ha Paol	A.J.I.P.

Da zeiz ar vodadeg ha tri dervez d'ho choaz : I. P.

HON ANAON. — Breles : Fransez Lescop, Raymond Marc; Saint-Mark : An. I. Morvan; Kolloreg : Mari Bouar; Plougin : Mari Perrot.

EUN TAOL-LAGAD WAR VA BUHEZ : diwar-benn va bizitou.

1^o. — Bez'ez eus bizitou didalvez, danjerus, kontrol da spered an Aviel. Ha n'oun ket douget d'ober bizitou evel-se, war zigare ma 'z eo ret ober diouz ar bed, ma n'heller ket ober a-hend-all, pa vezer savet mat, h. a...

2^o. — Bez'ez eus bizitou gourc'hennemet gant deveriou ar stad hag ar garantez e-kenver an nesa. P'am eus graet ar bizitou-se, ha graet em eus diouz va gwella evit pellaat diouzin spered foll ar bed ha chom evelato unanet gant Doue ?

3^o. — Bez'ez eus bizitou talvoudusoc'h eget ar re-all, ar re a vez graet d'ar re glanv, d'ar re baour, d'ar re glac'haret. Daoust hag aketus oun d'ober ar bizitou-se ha d'ober anezo evel ma 'z eo dleet, evit mat an eneu ha gloar an Aotrou Doue ?

4^o. — Eur c'hristen, — an hini a zo en Drede-Urz dreist-holl, — n'ankounac'ha ket ar wella eus an holl bizitou, ar vizit d'ar Sakramant meulet ra vezo. Ma n'hell ket mont d'an iliz, e sonjo da vihana e Jezuz en e dabernakl. Ha bez'em eus war ar poënt-se spered sant Fransez, a gare kement Sakramant an Aoter ?

PIRC'HIRINAJ AN DREDE-URZ
E SANTEZ-ANNA-WENED

a vezo er bloaz-man d'ar sul 23 a viz Gouere dindan renadur an Tad Benead-Josef, Provinsial. — Digoret e vo, evel kustum, d'ar sadorn da noz (22 Gouere). — Er miz a zeu e vo displeget hirroc'h urz ar Pirc'hirinaj.

Kenteliou

an
Aviel

**Douster Jezuz e-kenver
eur vaouez avoultrerez**

Biskoaz ne teuas a benn ar Farisianed da lakaat nec'het Hor Salver, na da gaout, en e zivizou, eun dra bennak hag o dije gellet tamall d'ezañ. An dra-se koulskoude eo a glaskent hep ehan « *Mar gellomp, emezo, ober d'ezan mont enep hol Lezenn, ar bobl sur awalc'h a gemero ivez kas outan.* »

Eun devez eta, kercent ha goulou deiz, Jezuz a yeas adarre d'an templ, hag evel ma oa en em vodet ar bobl endro d'ezan, ec'h azezas hag en em lakaas da brezeg d'ezo. Setu ma tigouezas neuze eun toullad Skribed, mesk ha mesk gant Farisianed, hag o lakaat dirak Jezuz ar vaouez a oa ganto e lavarjont d'ezan : « *Mestr, ar vaouez-man hon eus kavet oc'h ober ar pec'hed a avoultrerez. Evel ma ouzoc'h, hervez lezenn Moizez e tle beza lazeta da oliou mein. Ha c'houi petra lavarit diwarbenn kement-se ?* »

Sonjal a raent enno o-unan; ma lavar ne dle ket beza lazeta da oliou-mein, ez aio enep hol Lezenn, hag e c'hellimp e damall. Ma lavar e tle beza lazeta, e lavarimp eo kriz ha didreuz hag e ya enep lezenn ar romaned, mistri ar vro; rak n'eus mui nemeto hag o deus gwir da gondaoni d'ar maro. Evelse, ne vern penaos e responto hor bezo krog warnan.

Jezuz hag a lenne e goueled o c'halonou a chom eur pennad hep respont d'ezo; goude e stou e benn hep lavaret ger hag e skriv, gant e viz, war an douar. Ne baouez ket koulskoude ar Farisianed da c'houlenn e ali digantan.

Skuiz ouz o c'hlevout, Jezuz a sav e benn hag a lavar d'ezo : « *An neb ac'hanoc'h en em gav dibec'h, ra daolo outi ar maen kenta !* »

Ha kercent e stou adarre e benn hag e kendalc'h da skriva war an douar. O klevout komzou Jezuz, e enebourien a dec'h kuit, an eil warlerc'h egile, ar re gosa da genta. Marteze e oa skrivet, gant Jezuz, o fec'hejou dirak o daoulagad. Rak, e gwirionez, hag her gouzout mat a raent, n'oa hini dibec'h ebet anezo... ha setu perak hini ebet ne gredas labeza ar vaouez kablus.

Chomet e-unan gant ar vaouez-se, Jezuz neuze a sav hag a lavar d'ezi : « *Maouez, e pelec'h emañ an dud ho tamalle ? Hini ebet eta n'en deus ho kondaonet ? — Hini ebet, Aotrou ! — Mat, eme Jezuz, me kennebeut n'ho kondaonin ket. It gant hoc'h hent, ha na bec'hit mui en amzer da zont.* »

Setu penaos e kavas Jezuz an tu da ziskouez e vadelez d'eur bec'herez paour, hep terri Lezenn Moizez, ha d'he dougen koulskoude da zont er-maez eus he stad a bec'hed.



Jezuz, neuze, en em laka adarre da brezeg d'ar bobl, dastumet en Templ : « *Me, emezan, eo sklerijenn ar bed, An neb a zeu d'am heul ne gerz ket en denvalijenn, bez'en deus sklerijenn ar vuhez.* »

Darn eus ar re a oa ouz E selaou — Farizianed e oant — a oa nec'het gant e gomzou, rak sklaer e verkent en em zisklerie gwir Doue.

« Dougen a rit testeni ac'hanoc'h hoc'h unan, emezo; eur seurt testeni ne dalv netra. » Jezuz a respont d'ezo :

— Hag e rofen testeni d'in va-unan, gwir eo an testeni-se; rak gouzout a ran a belec'h e teuan ha da belec'h ez an... Ha neuze n'emaoun ket va-unan : va Zad, hag en deus va digaset, a ro ivez testeni d'in, dre ar miraklou a ra d'in ober.

— Ho Tad, emezo, e pelec'h eman'ta ?

— Ne anavezit, eme Jezuz, na va Zad na me; ma anavezfec'h ac'hanou e anavezfec'h ivez va Zad.

Ne glaske ket ar Farizianed gouzout ar wirionez diwarbenn Jezuz. A-hend-all, peogwir e rae miraklou hag e lavare e oa Mab an Tad eternel, o dije E anavezet mat ha kredet start e oa, a-holl-viskoaz, Doue evel E Dad. Met n'o doa ket eur spered nag eur galon eeun ha didroidell hag evelse en em zisklerient atao enep hor Salver.

Hirio an deiz, ez eus c'hoaz tud henvel outo : an dud ne gredont ket ar pez a lavar an Iliz a zo henvel ouz ar Farizianed; ne glaskont ket da vat ar wirionez, n'eo ket leal o c'halonou.

Jezuz a lavaras c'hoaz d'ezo : « C'houi a varvo en ho pec'hed, ma ne gredit ket ar pez a lavaran-me ez oun ». — Piou eta oc'h-c'houi ? emezo. — Me eo, a respont Jezuz, ar penn kenta eus an holl draou ; da lavaret eo : Me 'zo araok an holl draou krouet.

N'helle ket Jezuz diskleria sklaeroc'h e oa Doue, an Hini a zo a holl-viskoaz. « P'am gwelot savet etre an Nenv hag an douar, neuze e ouezet piou oun ». Komz a rae eus ar pez a dleent ober d'ezan hep dale : e staga ouz ar groaz e chomo warni teir eur, savet etre an Nenv hag an douar.

E gwirionez, goude maro Jezuz war ar groaz kalz Juzevien o doa anzavet e oa Doue hag a oa distroet davetan.

◆◆◆

Warlerc'h an divizou-se, e-leiz a Juzevien o doa kredet e Jezuz. D'ezo Hor Salver a gomzas evelhen : « Ma rit ar pez a lavaran d'eoc'h e vezot va gwir ziskibien; anaout a reot ar wirionez hag e viot ganti tennet eus ar sklavelez.

— Met emezo, ni zo eus lignez Abraham, ha biskoaz n'omp bet sklavourien da zen. — E gwirionez m'hel lavar d'eoc'h, eme Jezuz, an neb a ra eur pec'hed a zo sklavour d'ar pec'hed.

Petra'zo sklaeroc'h eget ar gomz-se ? Eur sklavour eo ar pec'her : sklavour eo d'ar pec'hed en deus graet hag a chom war e ene. Merket eo en Aviel, Jezuz e-unan eo hel lavar d'eomp.

An neb a zo sklavour n'eo mui mestr warnan e-unan; eman din-dan eur mestr all ha plega a rank d'ezan.

An neb a gouez er pec'hed, dreist pep tra, ma chom pell er stad a bec'hed, a zo sklavour d'ar pec'hed ha d'ar gwall dechou o deus e zouget da bec'hi : sklavour d'an ourgouilh, sklavour d'al luksur, sklavour d'an avaristed... ha dalc'het eo ganto evel gant ereou hag a zo diaes da derri. Ha ma c'houlenner digant ar pec'her-se, dont er-maez eus e stad, evit heulia eur vuhez all, alies e vezo klevet o respont : n'hellan ket, staget oun.

Staget eo, dre n'en deus ket dalc'het penn d'e fallentez. Deuet eo da veza sklavour e fallentez, sklavour an diaoul hag a zalc'h penn ar chadenn. Marteze zoken eo gwelloc'h gantan chom er stad-se, dre ma kav ennan e blijadur.

M'emaoc'h er stad-se, torrit buan ho chadenn. Doue, m'E bedit, a roio sikour d'eoc'h. Diouallit da veza kavet gant ar maro, staget gant eur chadenn vezus : rak neuze n'hellfec'h biken he zerri, hag e vefec'h, epad an eternite, dindan sklavaj an diaoul, elec'h beza gant an Aotrou Doue, e eürusted ar baradoz.

D'ar 16

a
viz even
eman



En amzer denval ma vev enni hor bro hag ar bed, muioc'h eget biskoaz, diredomp betek kalon Hor Salver leun a garantez evidomp.

« Digantan eo ret gouenn ha gortoz ar silvidigez » a lavare ar Pab Leon XIII^e.

« Kalon Jezuz eo eienenn an holl c'hrasou » a lavare hag a aslavare Santez Mac'harit-Mari.

Bezomp eta ennan eur fizianz hep muzul.

Hag er bloaz-man, gwelloc'h eget biskoaz, greomp gouel ar Galon Sakr.

D'ar gwener, 16 a viz even :

Eomp da ofisou hor parrez.

Dalc'homp sonj en deus Jezuz e-unan gouennet, digant an dud vat, diskouez d'Ezan o c'harantez, en dervez-se dreist-holl, hag evit-se :

ober eur gomunion santel,
en em gonsakri d'Ezan hag

E bedi gant karantez evit E zigoll diouz an dismegansou a danv e kalonou klouar, yen pe fallakr en e genver.

en deus ar Galon Sakr prometet : benniga an tiegeziou a vo enoret enno e skeudenn;

lakaat peoc'h hag unvaniez er familhou;
sikour ar re a vije en eun dienez bennak;

d'an dud a vezo en em roet hag en em gonsakret d'ezan en deus prometet : rei an holl grasou o deus ezomm hervez o stad;

o skoazella en o labouriou;

o frealzi en o foaniou
o diouall epad o buhez
ha dreist-holl da eur o maro.


LIDOMP GOUEL
AR GALON SAKREN
EUN DOARE SANTEL...

evit ma roio ar peoc'h d'hor bro.

Bemdez, dirak skeudenn ar galon Sakr, greomp ar bedennigman.

« Kalon Sakr Jezuz,
me 'n em ro d'eoc'h korf
hag ene, diouallit an Iliz
Santel, ho pet truez ouz
hor bro ha grit m'ho ka-
rin bemdez muioc'h
mui ».

DRADEM.



Ha galleg-saout adarre

Soazig, en eur chilgammat, a zeu gant an hent... setu ma tigouez ganti he amezogez ?...

— *Tiens, Soazig, tu es kamm ?*

— *Voui... va Doue, kamm je suis, bisur.*

— *Quoi qui est arrivé avec toi ?*


— *Le chien qui a krogé dans le ventre de ma jambe (e kov va gar)*

— *C'est hominabl ! ! Comment c'est arrivé avec toi ?*

— *Il était sur le n' oaled à liper le choadouroun... j'ai tiré sur son queue et il a krogé tout'suite...*

— *O, i faut faire entention avec les chiens surtout quand ils sont à liper quelquechose...*

GWIRBATER.



An eur
eo
an eur !

E Landourig oun bet en oferenn-bred. Goude ar c'hloc'h-galv, an Ao. Persoun, e gurust en e-raok, a yeas betek traon an Iliz da dôler dour benniget war... eur bern kadoriou goullo.

Epad ar C'hyrie, ar Gloria ha zoken an Aviel, ne voe klevet nemet trouz an doriou o serra hag o tigeri. An Ao. Persoun a oa krog mat en e sarmoun p'en em gavas Fanch Kerzu e tro kein e bilher, ha Marijanig e traon an Iliz...

Met, na damallit ket Fanch re vuan... arak dont eus ar gear, en deus ranket skarza ar c'hraou-saout... ne vez skarzet nemet d'ar sul ! Na damallit ket eta Fanch, ma kav d'eoc'h ec'h en em gemer mat gant e labour !

Ha Marijanig ! C'houi sonjo marteze he deus diou leo vale da ober evit dont betek an iliz. Fazia rit. Marijanig eo penherez merouri Penn-an-Tour.

Met ma n'eo ket hir he fennad hent eo hirroc'h an abadenn da ruilhenna he fennad bleo, da spega ar c'hoef ouz kern he fenn, da leda eur bern liou war he diouchod ha war he muzellou.

Berr e vezo avat he zammig oferenn ha berroc'h c'hoaz he fedenn, rak Marijanig hag holl Marijanezed Landourig ne vez chapelad na leor ebet ganto. N'ouzont ket petra da ober epad an oferenn hag e sellont a-gleiz hag a-zehou evit gwelet penaos eo gwisket Janedig, Katarinic ha Chuli... Mall a zo avat e ve echu an oferenn evit gellout mont d'en em ziskouez war ar blasenn !

Hag evelse parrezianiz Landourig a gav d'ezo servicha an Ao. Doue. Ober goap outan, a reont, ha netra ken.

■ ■ ■ ■

Lokifig a zo eur barrez a vez enni heuilhet an offisou eus an eil penn d'egile. Eur c'hart eur arak an oferenn, ar gurusted a zired da wiska o soudanenn ruz hag o sourpiliz wenn, ha da renka pep tra war dro an aoter.

Ar c'hloc'her a enaou ar goulou, hag ar ganerien bihan ha bras o deus mall da zispaka o moueziou flour.

Kerkent hag ar zôn-galv, pep hini a zo en e blas. Pa zeu an Ao. Person eus ar sakreteri e barrez a-bez a zo aze.

Ma rafe an « appel », an holl a c'hellfe respont « présent » ken barrek ha Yann Soudard.

An eil a ro skouer vad d'egile. Unanet evel breudeur, e sav eus kalon an holl eur bedenn birvidik war-zu Doue.

Komprenet mat gantan komz sant Aogustin : « an hini a gan a galon a bed diou wech », pep unan, gantan e leor-oferenn, a unan e vouez evit kana pedenn an Iliz. Eno an holl en em gar : an eil en em gav harpet gant egile.

Eur blijadur hag eur frealzidigez eo klevet an ofisou e Lokifig hag e kement parrez henvel outi emañ enno ar c'hiz santel d'en em gaout bepred d'an eur : *ar pezh a zo e galloud pep kristen ha re ma ket ar c'hiz gantan da chipotal gant Doue.*



Seza n'he deus ket bet he fask

Seza Kervouilhenn a zo unan eus ar gristenien klouar-se na roont ket kalz labour d'ar c'hloc'her evit skuba an iliz war o lerc'h...

Da amzer Fask Seza a zo bet o klask he fask, na petra'ta...

Relijion he deus Seza... Met eur relijion kempennet ganti he-unan... rak Seza a zo eus ar ouenn dud-se hag a gred start int bet karget gant ar Spered-Santel da renka ar relijion hervez o leziregez hag o faltazi... ha karget war ar marc'had da ober skol d'ar veleien. An dud-se n'int ket ken rouez ha ma sonj d'eoc'h...

Deuet eo Seza eus ar gador-govez evel eun tenn... herr ganti e-giz pa vije bet o vont da laza eun tan-gwall.

Yvonik an Tiplouz a oa eno o c'hortoz e dro a oa bet tost d'ezan beza troc'holiet kador hag all... hag o tremen e kichen ar varvskaoen e oa kement a herr ganti ma ledas, war leur an iliz, sailh an dour benniget...

Hag e yeas da di Rosa Goz da gemeret eur banne kafe... Eno e kontas he abadenn.

— Ar misioner n'en deus ket roet va Fask d'in... Ma talvez d'ezan muioc'h eget ma ra d'in, n'en deus d'ober nemet e zerc'hel gantan... Abarz ma 'z in d'e glask eur wech all...

« A-benn neuze hag ac'han di
En devo harzet meur a gi... »

— Goustadig Seza, va itron... N'ho peus ket bet ho Pask?... Ma vijec'h bet e stad vat evit e gaout e vije bet, sur oun, roet d'eoc'h...

Perak, eur wech ar bloaz, e sav c'hoant ganeoc'h dont da lavaret da Zoue ho peus karantez evitan... ez oc'h glac'haret da veza graet poan d'ezan... ha ne ehanit da zizenti outan eus an eil penn d'egile d'ar bloaz...

Ho merc'h a vez er skol laik, hag a dremen bemdez dirak dor ar skol gristen...

Eun deskadurez dizoue en deus eta evidoc'h muioc'h a dalvoudegez eget eun deskadurez a vez roet enni da Zoue ar plas kenta...

C'hoant ho peus beza gwelet mat gant an holl... gouzout a ran... Met, e hano Jezuz-Krist, ar beleg en deus an dever da lavaret d'ar gristenien : unan a zaou, pe gant Doue pe eneb Doue.

N'heller ket beza gantan hag enep d'ezan er memez amzer...

— gant Doue en iliz hag enep Doue er skol.

— gant Doue en eul levr oferenn, hag enep Doue en eur gazetenn.

— gant Doue da Bask hag enep Doue epad ar rest eus ar bloaz.

— gant Doue evit an interamant hag enep Doue evit ar friko.

Nann Seza, n'heller ket beza eur gontell hag a drouc'h diouz an daou du...


N'heller ket ober penn laouen ouz An Aotrou Doue hag ouz an diaoul er memes amzer.

N'heller ket bale war hent ar baradoz ha war hent an ifern, er memez amzer... re bell eman an daou hent-se an eil diouz egile, re vras rampadenn a ve ret ober evit kaout eun troad war bep hini.

Unan a zaou Seza... pe gant Doue penn da benn, e pep lec'h hag e pep amzer... pe netra.

Eur

gwall
abadenn



en

eur
garigell

Graet em oa va sonj, en dervez-se, da vont d'ober eun droig betek meneziou Ramanpudur, a sav o c'hribenn en tu all da Gundara, diouz tu ar sav heol. Ne oa ket diaes mont eus Quilon betek Kundara... Eur c'harr-dre-dan a ya hag a deu eus an eil ker d'eben...

Hag e Kundara, an Aotrou Doue, bepred leun a vadelez evit ar beorien, a lakaas, war va hent, eur c'harr bras daou ejen starnet outan, evit am c'has betek Ramanpudur.

Gwechall, pa oan yaouank, em bije bet mez o veaji en eur c'harr... Gwelloc'h e kaven mont war droad, hep aon ebet rak an dommder na rak ar skuisher.

Met heol tomm ar vro-man en deus digaset d'in eun tammig skiant-prena, ha war ar marc'had, laket d'in eun tammig ploum em fenn, ha kement-all em zreid...

Hag e oan laouen bras o kaout karrigell Kumaran... eur garrigell hag a ioa, e gwirionez, eur c'harr, peogwir he devoa diou rod... ha daou ejen evit starna outan.

Tud diaes da gompren eo an Indianed. Adori a reont al loened, ar saout dreist-holl, met ne roont ket a voued d'ezo da zebri.

Ret eo gwelet ar chatal o vont dre an henchou... eun druez eo ! Paourkez loened ! Ne glemmont ket, rak n'o deus ket zoken nerz awalc'h da vlejal, evit rei da gompren o deus naon.

Ejened Kumaran, diouz o gwelet, ne dorront ket bemdez o naon... Gourvezet e oant e foz an hent ha mil boan en devoe o mestr evit o lakaat da sevel hag o starna ouz ar c'harr.

Ha setu me er c'harr... Met, evel m'en deus an Aotrou Doue roet d'in divesker harr, e voe ret d'in chom puchet... Ha iao en hent... !

Eur charretour eus an dibad eo Kumaran, ret eo d'in hel lavaret. Ha mil boan e kemeras evit kas e jao buan ha buan, evel ma c'houlennen digantan.

Met, aes eo kompren, n'eo ket eur c'hoari lakaat da zaoulammat daou ejen koz treut-gagn ha poan d'ezo chom en o sav.

Kumara a yeas d'ezo da genta dre zousser... o lakaat e deod da strakal ouz e staon. Met an daou ejen ne raent ket kalz a van o klevet o mestr.

Kumaran neuze a strakas e fouet hag a binsas gantan ler an daou ejen. Ne yae ket buanoc'h ar garigell... Hag e voe ret d'ar paourkez Kumaran kregi e lostou e ejened... chacha warno, korvigellat anezo... En taol-man e yeas gwelloc'h an traou, ha wardro pemp eur e tigozejomp er c'horn bro am oa c'hoant da welet...

Va sonj eo sevel aman eur skol... hag araok hen ober eo ret d'in poueza mat pep tra, gant aon da veza dilojet, hep archer nag urcher, araok gouel Mikael.

Chomet e vijen bet eno epad hir amzer, ken c'houek e oa diskuiza e disheol ar gwez bras... Met ret e oa d'in distrei d'ar gear...

Kumaran hag e ejened a oa kousket-mik war an hent... ha ret e voe d'in hoja dihoja va charettour evit e zihuna...

Ha setu ni adarre war an hent... Sur oun e kemeras Kundara kalz muioc'h a boan da chacha lostou e

ejened, eget ma kemeras ar re-man da chacha war o sugellou...

Puchet er c'harr, em oa mil boan o viret da goll pasianted...

Met, pa vez sellet ouz pep tra gant daoulagad ar feiz... e kaver buan ez eus eur bern traou n'o deus pouez ebet evit eur c'hristen... n'eus nemet eur rummad traou hag a zo traou a bouez : ar re a hell tostaat ac'hanomp ouz Doue, pe pellaat ac'hanomp dioutañ.

Deuet e oan eta a-benn da lakaat ar peoc'h em c'halon ha da zerc'hel war va imor fall...

Met sonjal a raen e vije moarvat ret d'in tremen va nosvez e ostaleri ar pevar ayel, hep koan nag askoan... met kement-se ne oa ket eur gwall abadenn... Na kaer eo ar vuhez pa ouezer he c'heme-rout diouz an tu mat...

O sonjal e kement-se e oan pa gavas d'in santout e tec'he ar c'harr a zindanoun hag ez edon o rinkla n'ouzoun ket e pelec'h...

Petra'ta ioa a-nevez ?

O, nebeudig a dra... An daou ejen, skuiz maro, o doa sonjet e oa poent diskuiza hag, hep goulen ali nag aotre, a oa gourvezet war an hent bras... War an taol, e oa bet dibradet lost ar c'harr, ha, me, hep gouzout d'in, a reas patati hag en em gavas ac'haoliet war gein treut « Kala », an ejen a oa en tu dehou...

Kumaran en doa lammet diwar al limoun, hag a c'hortoze, en e sav war an hent, klevet gourdrouz ha grosmol ganen.

Met furoc'h e kavis chom sioul... hag e ris eur mousc'hoarz laouen en eur lavaret d'ezan kenavo.

Ha setu me gant va hent... Kaout a ris, rak eur wech c'hoaz mat eo Providañz Doue evit ar paourkez, eur c'harr-dre-dan... an hini diweza a oa bet daleet n'ouzon ket e pelec'h hag a gerze warzu Quilon, eun eur hanter re ziwezat...

Abred awalc'h e oa evidoun-me... rak anez e vijen bet kousket e foz an hent e-kichen Kumaran hag e ejened.

ga

an

TAD

MARIE-URBAIN

Hag anaout a rit-hu Yaouankiz kristen ar mêziou ?

(Y. K. A. M.)

Evit ar baotred

PIOU OMP

En deiz a hirio, galloudusa emzao yaouankiz a zo war ar mêz, — *an hini reizet ar gwella*, — ez eus anezan en holl departamanchou, — gant e 80 kevredad (fédérations); — e 1500 kevrenn peurzavet, — e 3.000 kevrenn war veza; e 30.000 a izili, — e 65.000 koumananter da *La Jeunesse agricole*.

Hon galvadenn a gasomp d'an holl dud yaouank diwar ar mêz, forz pe stad ha pe vicher o dije.

AR PEZ A FELL D'EOMP

Troc'ha ar walenn m'eo an divroerez etouez tud ar mêziou, gwalenn hag a gas da hesk ar vuhez war ar mêz hag a garg ar c'hêriou a dud dilabour.

Evit se, e *fell d'eomp* :

Ma ne vo ket barnet ar c'houer da veza da viken dindan e vec'h;

Ma en devo 'barz ar vro ar renk dleet d'ezan;

Ma vo graet al lezennou *dioutan*, d'ezan da denna frouez diouto, hep kaout d'o gouzanv hepken evel eur samm;

Ma vo savet keit ha keit stad al labourer ha hini micheurour kêr;

Fellout a ra d'imp e renfe hiviziken, war ar mêz, elec'h al lezenn *pep hini 'vitan e-unan*, lezenn ar wir garantez, an holl o 'n em douja hag o 'n em harpa evel breudeur.

Fellout a ra d'imp e teufe yaouankiz ar mêziou, labourerien, artizaned, evel ma 'z int, da veza *barrek-tre* war o *micher*;

Ma vo stad enno gant ar vicher-se, ha ma c'hallfont sellet en o rôk gant fizians, aon ebet d'ezo da rankout chom hep sevel tiegez.

AR PEZ HON EUS GRAET BETEK HEN

Dija, a drugare da Y. K. A. M., labourerien yaouank, dre vil, o deus kemeret kalon hag a zo en em roet hep damant d'al labour.

— 113 —

Dija, a drugare da Y. K. A. M., labourerien yaouank, dre vil, o deus paouezet gant ar bozamanchoù rekis a oa gwechall hag o deus studiet gant evez o micher er *skol dre lizer*.

Dija, a drugare da Y. K. A. M. al labourerien yaouank n'int ket ken dilezet o-unan. Levenez yac'h a zo adarre war ar mêz, gouelioù hag ebatou a bep seurt o veza bet savet, teâtr, sport, kêr, gouelioù an ed, hag all...



Dija, milieroù a re yaouank, bet stummet gant Y. K. A. M., a weler lakat klask war o lerc'h da veza o ren, er penn kenta, Oberou ar barrez, kargou ar gomun.

N'eus nemet dek vloaz abaoe ma 'z omp krouet ha dija eo frank ha kaer al labour hon eus graet. Hon C'hendalc'h bras (21-23 ebrel 1939) a zo aze 'vit diskouez d'ar bed holl eur galloud n'anavezer ket.

Evit ar merc'hed

PIOU OMP

Emzao merc'hed yaouank ar mêziou : *holl* verc'hed yaouank ar mêziou : *labourezed, artizanezed, konversantezed, — bugale perc'hen, mêtour, mitizien, —* merc'hed a bep renk, a bep stad, hag a zo etrezo, dishenvel evel ma z' int, framm ar Vicher labourer.

Hirio, goude n'omp c'hoaz nemet tri bloaz, ez omp 80.000 o lenn ar *Jeunesse agricole féminine* (koumanant : 7 lur).

30.000 o labourat gant *La Page de la militante* (koumanant : 10 lur, P. M. ha J. A. F.)

Beza hon eus 70 kevredad reizet mat;

1.000 kevrenn peurzavet; etre 4 ha 5.000 en hent da veza;

15.000 a grennardezed etre 12 ha 15 vloaz a zo bodet dindan an hano « *Jeunes Semeuses* » (koumanant, 2 skoed);

20.000 plac'hig etre 8 ha 12 vloaz a labour gant « Grandir ». (Koumanant : 20 real.)

AR PEZ A FELL D'EOMP

Gant hon breudeur eus Y. K. A. M., e *fell d'imp* stourm ouz an holl reuziou a gorf hag a galon a bouez war vuhez al labourer hag a ra d'ar re yaouank kemer hent kêr, tra hag a roio taol ar maro d'ar Frans, mar ne ve ket plêet raktal.

Ni a fell d'imp lakat da vleunia war ar mêz, e kreiz levezeg hag onestiz, buhez ar venajerezed yaouank.

Ni a fell d'imp e teufe ar gouerieadezed yaouank, goude anaout mat o stad hag o galvedigez, da c'hallout ren en o zi o c'harg a bried hag a vamm.

Ni a fell d'imp ma vo stummet gant evez ar gouerieadezed yaouank, diouz ma 'z int galvet da veza warc'hoaz; ma teskfont gwelloc'h o micher, menajerezed hag artizanezed, evit gounit peadra da veva gant enor.

PEZ HON EUS GRAET DIJA

E Y. K. A. M., rann ar merc'hed a zo nevez c'hanet; *n'eo c'hoaz nemet tri bloaz*. Daoust da se, kalz a labour a zo bet graet gantan.

Dija, a drugare d'hon Breuriez, e weler o tiwan, e milerou a gêriadennou, e lec'h lezenn ar *pep hini 'vitan eunan* ha na vag nemet tristidigez, lezenn ar garantez a gas levezeg d'he heul, a stard ar plac'hed yaouank etrezo, a gresk o nerz hag a ro d'ezo fizians en amzer da zont.

Dija, a drugare d'hon Breuriez, zo savet war ar mêz diduamanchou onest a skuilh endro d'ezo eul levezeg yac'h, hag a ro da blac'h yaouank ar mêziou ar renk enorus dleet d'ezi.

Ha c'hoant hoc'h eus d'hon sikour da savetei ar mêziou, da stumma eur gwisk nevez a labourerien ampart a ouio en em ober, hag a vo, evel gwechall, mammenn veo ar vro abez ?

Neuze, harpit, sikourit Y. K. A. M.

Ha mar d'oc'h yaouank, na rit ket daou sonj : Deuit davedomp ! Etrezomp, ni a chenko penn d'ar bed ! Netra ne harzo ouzimp, pa 'z aimp d'ezi a-droc'h, gant holl nerz hon yaouankiz .

BREIZ.

Santez Anna ha Nikolazig

Aman e weloc'h penaos eo deuet Santez-Anna-Wened, pe Keranna, da veza eul lec'h ken brudet.

(Diwar levr an Aotrouned Buleon ha Garreg)

Piou eo Nikolazig ?

Yvon Nikolazig a oa o chom e Ker-Anna. reomp hepken en devoa daou ugent bloaz e 1622.

Yvon Nikolazig a labourer eur verouri ha brudet bras e oa da veza eul labourer-douar dispar ha gouizieq war e vicher.

Edo dimezet abaoe daouzek bloaz, met n'en doa ket a vugale; ar pezh a rae d'ezan kalz poan.

D'ar mare-se dija — 300 vloaz a zo abaoe — ar galleg a oa staget d'en em sila war ar mêziou en hor bro, met Nikolazig gant aoun da goll eun dra bennak eus e eounded (simplicité) ne fellas gantan biskoaz deski ar galleg.

Daoust da-se, Nikolazig en doa eur spered lemm kenan, leun a skiant vat; bez ez oa eun den eveziek ha didroidell, bepred laouen, eeun e kenver an holl; n'eus ket eur rebech d'ober d'ezan war ar poent-se.

Ouspenn ar plegou mat-se, e welomp ennan c'hoaz eleiz a re all : e vuhez direbech e pep doare a zo eur skouer dispar evit an holl; izel a galon, ne glaske nemet an tu d'ober vad d'e nesa, ha ken leal e oa m'en dije karet muioc'h koll e holl vadou kentoc'h eget ober gaou ouz unan bennak.

Ne glask trabas ouz den ha dalc'hmat e chomas distag-krenn diouz ar vezventi milliget a ra kement a zroug en hor bro, siouaz !

◆◆◆

Karout a rae ar beorien hag ober a rae aluzenou ken bras ma sblantenn beza dreist galloud e zanvez.

Eun devosion vras a zouge d'an anaoun hag alies e lakae oferennou d'e diboania.

Eur garantez dener en devoa evit kroaz Hor Zalver; ha pa dremene, war ar mêz, dre gichenig eur C'halvar bennak, e taouline warnan eur pennadig.

E galon a oa troet kalz da bedi ar Werc'hez; bemdez e lavare e chapeled; ha, diouz an noz, pa n'helle ket kousket e kendalc'he d'hel lavaret.

Met ar pezh a oa dispar en e zevosion, eo ar garantez vras a zouge da Zantez Anna, « e Vestrez vat » evel ma lavare. Hag ar garantez-se en devoa ez-vihanig, a greskas ennan a vloaz da vloaz.

Koulskoude e zevosion a bigne c'hoaz uheloc'h : Bep sul ha bep gouel e tostae ouz an daol santel — ar pezh a weled nebeud d'ar mare-se.

Evelse eta, skouer ar gwir Vreizad, a oa er memes amzer skouer ar gwir gristen.

◆◆◆

Ar seurt tud-se a zo rouez, ha n'hellont ket beva diana-vezet n'eus forz e pelec'h e vevont.

Arabat eta beza souezet mar d'oa Nikolazig prizet muioc'h eget an dud all. Gounit a rae karantez ha fizians an holl, ha pa save tabud pe dizunaniez er geriadenn Yvon Nikolazig a veze karget da lakat emgleo : « *Pa n'hellomp ket en em glevout, a lavare an dud-se, d'eomp da gaout Nikolazig !* »

Kuzuliou mat en devoa evit pep den. Ne gomze nemet diouz ret, hag an holl a zouge d'ezan eun *doujans* vras.

Ar pezh a rae d'ezan avât, beza dreist d'an dud all, eo ar « skiant-vat kristen » a gavomp gwrizienet doun en e ene.

V. S.

JEZUZ-KRIST HAG E RELIJION

(Kendalc'h)

Goude beza gwelet piou eo Jezuz-Krist : Mab Doue en em c'hraet den, e tleomp klask perak eo deuet Mab Doue war an douar.

Eil lodenn : PERAK EO DEUET JEZUZ-KRIST ?

Deuet eo evit savetei an dud, renta d'ezo an eurusted.

Jezuz E-unan hel lavar : « *Doue, emezan, en deus karet kement an dud, m'en deus digaset e Vab d'o savetei.* »

« *N'oun ket deuet, emezan c'hoaz, evit beza servijet, met evit servija.* »

Hag, e gwirionez, dre garantez evit an dud eo en em c'hraet den, henvel ouz pep hini anezo; evit an dud en deus, epad 30 bloaz, bevet kuzet e Nazaret, gouzanvet, en e gorf hag en e ene, kement poan a hell eun den gouzañv.

Evit an dud en deus roet e vuhez.

Levenez ha sklerijenn.

Penaos en deus Jezuz digaset eürusted er bed ? Dre lakaat sklerijenn er sperejou dre e gelennadurez; dre rei nerz d'ar c'halonou dre e skoueriou; ha dreist-holl dre rei buhez d'an eneoù dre e c'hras. « *Eürus, eme levr an Imitation, an hini a zo desket gant ar wirionez He-unan, an hini a wel ar wirionez dirak e zaoulagad ha nann kuzet dindan eur bern gevier.* »

Jezuz a ro d'eomp sklerijenn war an traou hon eus ar muia ezomm da c'houzout : petra eo Doue evidomp, petra dleomp beza evitan, petra eo ar vuhez-man ha petra vezo ar vuhez da zont.

Ar Juzevien, a dra zur, a anaveze ar gwir Doue. Met ne welent anezan nemet e c'halloud hag e justiz. Jezuz a zesk d'eomp eo Doue, da genta ha dreist pep tra, eun Tad evidomp, eun Tad leun a vadelez. « *Pa bedit, emezan, lavarit evelhen : Hon Tad...* »

Eun Tad eo Doue.

Ne dleomp ket eta kaout aon rak Doue.

« *Piou ac'hanoc'h ma teufe e vugel da c'houlenn digantan eun tamm-bara a rofe d'ezan eur maen ?.. Ma ouzoc'h c'houi, daoust d'eoc'h da veza karget a fallagriez, rei traou mat d'ho pugale, penaos e c'hellfe Doue, leun a vadelez, nac'h ouz e vugale ar madou o deus ezomm anezo ?* »

Perak, emezan c'hoaz, lakaat diaes ho penn gant an amzer da zont ? *Ho Tad a zo en Nenv a oar mat petra ho peus ezomm...* »

Kaout fizians e Doue ne viro ket ouzomp kaout evitan doujanz ha resped. Er c'hontrol eo, seul vui a garantez hon devo evitan, seul vui e tiouallimp da ober d'ezan an distera displijadur. Evel Jezuz, « *hor magadurez a vezo ober e volonteiz e pep tra.* »

Pebez levenez evit ar galon gouzout eo Doue hon Tad ! Nag a anken a denn diwar hor spered ar sonj e c'hellomp konta war e Brovidanz evit rei d'eomp hon holl ezommou hag hon diouall diouz pep droug.

Breudeur an eil d'egile.

Da heul ar wirionez-se, e tesk Jezuz d'eomp unan all, ken talvoudus evit hon eürusted war an douar.

« Deskit, emezañ, ez oc'h holl breudeur... Na c'halvit den ebet war an douar « Tad »... rak n'ho peus nemet eun tad, an hini a zo en Nenv. »

Holl eta e tleomp en em garet, en em sikour, diouall da ober d'ar re all, ar pez ne garfemp ket e ve graet d'eomp hon unan.

Nag eürus e vefe an dud, ma selaoufent mouez Jezuz.

Ar pez a vir outo, peurvuia, da veva e peoc'h eo eur garantez direiz evit madou an douar. Aman adarre e teu Jezuz d'o difazia... N'eo ket an danvez a ra an den, met ar vertuziou a laka da vleunia en e ene. An den a dalv ar pez a ra evit kaeraat e ene ha plijout da Zoue. Ha Doue ne fazi ket o varn an dud... Ar Farizian a zeu d'an Templ d'en em bompadi a zistro d'ar gear gant e bec'hejou, hag ar publikan a anzav n'eo nemet eur pec'her a zo dizammet d'ezan e galon.

Poueza kalz a ra Jezuz war al lealded. Ret eo beza leal gant Doue, leal gant an dud. Lavaret e karer Doue ha terri e lezenn war an distera digarez, lavaret e karer an nesa ha chom hep ober vat d'ezan n'eo nemet pilpouzerez.

Arabat eta lezel ar galon d'en em staga ouz madou an douar, a vezo, n'eus forz penaos tennet diganeomp eun deiz gant ar maro. Rak n'omp ket graet evit an douar, met evit an Nenv.

Ar vuhez-man n'eo nemet eun tremen, eur pennadig amzer roet d'eomp evit gounid ar Baradoz. Eno emañ hor bro eno e kavimp ar gwir eürusted.

Ar familh.

Evit hor sikour da gerzout gwelloc'h betek hor gwir vro, Doue en deus savet ar familh. Lakaet en deus enni vad ha peoc'h dre embann sklaer lezennou ar briedelez, dre verka e renk hag e zeveuriou da bep hini.

Ma n'eo mui ar vamm eur sklavourez met eur rouanez en he zi; ma 'z eus breman resped evit buhez ar c'hrouadur, da Jezuz ha d'e Aviel eo dleet kement-se.

Nag a anaoudegez vat a dle d'ezan c'hoaz an dud a renk izel, ar re holl a c'hounid o bara diouz c'houezenn o zal. Dre e skouer ha dre e gelennadurez, Jezuz en deus gwellaet hag uhelaet, e pep doare, stad al labourerien. D'an holl, paour ha pinvidik, en deus prezeget al lealded, ar garantez, ha dre eno diskouezet an hent evit diazeza ar peoc'h etre an dud a bep renk.

Sklaer eo, da gement den n'eo ket dallet gant ar fallagriez, en deus Jezuz, dre e gelennadurez digaset eürusted war an douar.

REP.

AR FALC'HERIEN

Falc'herien kerneiz, war sao mintin mat,
O falc'h war o skoaz, a ziskenn er prad.
— Tomm e vo an deiz, eme Lom Kervran.
— Bez dinec'h, paotr koz, chistr mat 'zo distan.

An dir lemm a son, e strad an draonienn,
Gant pokou garo ar maen higolenn.
Ruz glaou, en dremwel, e tarz eur sklaerder :
Heol Doue a sav, ruz-mouk, ruz-tener.

Bec'h 'ta d'al labour ! bec'h 'ta paotred gour !
Klevit o seni « angelus » an tour.
Dindan an haleg, hiboud an dour red,
'Ro lercz ha kalon d'ar re n'o deus ket.

E-mesk ar yeot hir, dre heg pe dre gaer
Ar falc'h dir a red, a sut 'vel eun naer.
Warlerc'h ar falc'herien : riblennou glas
Ha roudou o zreid o kerzout d'ar paz.

Warlerc'h Per, Fanch koz a chach war e falc'h.
Mevl bras Timeur tost d'ezo a zalc'h,
A-renkad ez eus pemp, c'houec'h, seiz gwaz mat,
Ha filc'hier a nij war c'hlazenn ar prad.

War ar flourenn c'hleb, foenn a gouez ingal.
Bugale laouen o strev 'n eur fringal.
Daoust d'an dommder pep hini 'ray e lod :
Aze 'skeud ar c'harz 'z eus chistr leiz ar pod !

— Kalon ! paotred vat, fin a zo d'an deiz !
Divogedi a ra chiminal Kerneiz.
Kig ha farz a zo war daol tintin Soaz
Da rei nerz d'ho korf ' benn an deiz warc'hoaz.

LAOUENANIG BREIZ.



DIVINADENN

— Perak e vez klevet kalz tud o lava-
ret traou ouz ar veleien !

— Abalamour ma 'z eus kalz tud hag
a ra drebon do c'houstianz gwelet eur
beleg.

Eun istor ... hep marvailhou ...

